



Friou

Kanaouenn skrivet gant Jakez ar Born

Pladenn : Aiou embannet gant Brennig ar c'hurnig

Ur fri le dan en deus Jakez,
Ledanañ fri ar barrez.
Ur fri ledan en deus jakez,
Ur fri da zouarañ ar patatez.

Diskañ :

O ya da ! Dont' raio an amzer.

O ya da ! Ma vezi brav.

O ya da ! Dont'raio an amzer

Daoust d'az kozh tamm fri divalav.

Ur fri hir en deus Paol,
Hirañ fri Kastell-Paol.
Ur fri hir en deus Paol,
Ur fri mat da fourrañ kaol.

Ur fri togn en deus Goulc'han,
Tognañ fri bro bagan.
Ur fri togn en deus Goulc'han,
Ur fri mat da bladañ amann.

Ur fri tort he deus katell,
Tortañ fri breizh izel.
Ur fri tort he deus katell,
Ur fri da zastum rigadell.

Ur fri kamm en deus Alar,
Kammañ fri Locmelar.
Ur fri kamm en deus Alar,
Ur fri mat da guthuilh mouar.